

19  
—

**CONFÉRANÇOU  
CURIUS,  
UTIL HAC INTERESSANT,**

COMPOSET EVIT

AMUSAMANT AN DUD DIVAR AR MEAZ,

GANT A.-L.-M. LÉDAN.



E MONTRUOLEZ,

E ty LÉDAN, Impr.-Librer, e traon ru ar Vur.

## AVIS D'AL LENNER.

Da zezirout eo e ve placet en oll tieguezou var ar mèz, er c'huz-tol, diou blanqennic, an eil a uz d'eben, var bere e ve placet reiz al Levriou e zàn da henvel :

Buez ar Zent. — An Aviél. — Imitation Jesus-Christ. — Deveriou ar C'hristen. — Instructionou Christen evit an dud yaouanc. — Curunen ar Vere'hez. — Imitation ar Vere'hez. — An Devez Mad. — Reglamant a vuez. — Instructionou profitapl evit an oll. — Levric an Æl-Gardien. — An Doctrin Gristen. — Heuriou Brezonec. — Ar C'hatekismou. — Catekis historic. — Mellezour ar C'halonou. — Canticou Nevez. — Canticou spirituel. — Mis Mari. — Hent ar Groas. — Devotion da Galon Sacr Jesus. — Ar Scapuler. — Ar Rozera. — Chapeled pe Curunen hor Zalver. — Pedennou evit an Azvent hac ar C'horaiz. — Mysteriou an Oferen. — Buez Joseph. — Ar Pêvar Mab Emon. — Trajedi Jacob ha Trajedi Moyses. — Simon a Vontroulez. — Ar Bonom Mizer. — Sermon ar Vesventi. — Fanch Còs. — Güizieguéz ar Potr Còs Richard. — Antretien var ar Poeziou hac ar Muzuriou neve. — Michel Morin. — Displijadur eur C'hure d'e vatez Lorança. — Ar Buguel Fur. — An Den Expert. — Ar Pastoral. — Collocou gallec ha brezonec. — Güerziou ha Soniou, etc.

Caout a rêr c'hoas : Paper; Plùn; Liou; Crayonou; Canivedou; Caehet; Plùn dir; Reglennou; Paper aour hac arc'hant; Paper fleuriet; Greun bian da ober goalinier; Taulennou; Imachou; Mein tô fin ha Crayonou da scrifa varne, evit ar scoliou; Cahierou bras ha bian; Portefeullou, ha pep seurt Deillou, re glas, arc'hant hac aour; Pennou Hed, arc'hant hac aour ive, oll evit ober Boqedou, ha calz a draou all er guis-se.

Cartou da c'hoari, Jenyou Lotto ha Dominoyou, etc.

*Al Levriou-ze a gaver e ty LÉDAN, Imprimer,  
e Montroulez, e traon ru ar Yur.*

# CONFÉRANÇOÙ

CURIUS,

**UTIL HAC INTERESSANT.**

---

G. *Gant piou e zeo bet poblet ar bed?*

R. Gant bugale Nôë, Sem, Cham ha Japhet.

G. *Pez seurt partach a voe grêt dezo?*

R. Sem en devoe al lodennou eus ar c'hreiz-de eus an Asi; Cham en devoe an Afriq, ha Japhet an Europ, hac al lodennou nord en Asi.

G. *Pet sqiant natur en deus an den?*

R. Pemp: Ar Güelet, ar C'hêvet, ar Blassa, ar C'huesssa, hac an Touch.

G. *Piou en deus invantet ar Scritur?*

R. En attribui a rêr da Zoue memes, a roas da Voyses an dec Gourc'hemen eus al Lezen, scrifet var diou daul ven. Cadmus, roue Thêbes, mab da Agenor, roue Phenici, a zigassas ar Scritur eus ar Phenici en Greç, vardro ar bloaves 1617 aroc J.-C.

G. *A bez seurt utilite eo ar Scritur?*

R. N'en deus den na gonven e zeo an utilla eus an oll sqiantchou: beza e zeo ene ar c'hommerç, tablen an amzer dremenet, reglen an hini da zont, ha messajer ar sônjesonou. Anfin, ar Scritur a zo eun dra necesser

d'ar sqiantchou oll, pa zeo güir, anes-àn ne alfet qet ajissa e stat abet eus ar vuez, dreist oll, en eur vrô e pehini ne veyer nemet dre ar c'hommerç.

*G. Petra é an Eol?*

*R.* Eur voul caer meurbet, pehini a zo o sclêrijenna an douar, hac an oll gorfou ténval eus ar pezh a gompos ar bed.

*G. Petra en deus an Eol a deoder?*

*R.* Beza en deus vardro tri c'hant nontec mil léo, tost da gant unnec goech brassoc'h eguet hini an douar, dre betra e veler e zeo brassoc'h an Eol vardro ur milion pêvar c'hant mil goech eguet an douar. Beza e mâ pêvar milion léo ha trégont diouzomp.

*G. Da betra e servich an Eol?*

*R.* Da sclêrijenna ha da domma an douar, da brodui ar plant, an auevalet, ha da ober dê beva ha cresqi. An Eol a sclêrijenna ar bed abaoue ma zêo crouet, ha placet é gant Doue ive qer just evel ma é dleet, evit bea util deomp; rac, ma ve huelloc'h, ne alfe qet astomma an douar; ma ve izelloc'h, e teufe da c'hrilla qement zo oll. Servicha a ra c'hoas da regli bue an dud, dre an heuriou, an deveziou, ar misiou, ar bloaveziou hac ar c'hantvejou : anfin, hep an Eol ne alfe den beva.

*G. Lavarit din hac an Eol a flach?*

*R.* Goechall e credet e troe an Eol endro d'an douar; mes bremâ e zoar sur é an douar a ra an dro d'an Eol.

*G. Pegueit e mâ al Loar diouzomp?*

*R.* Pemp mil ha pêvar-uguent tri-c'hant peder léo varnuguent peurvuia, rac avichou e ve tostoc'h, hac avichou pelloc'h : vardro pemp goech varnuguent e zeo biannoc'h eguet an douar.

*G. Pegueit emedi ar Stered eus an douar?*

*R.* N'eus qet allet er stadudi en eur fêçon sclêr; mes gouzout a rêr penos ar re dosta a zo, d'an nebeuta tout, pêvar c'hant mil goech pelloc'h eguet an eol.

*G. Petra é eun Eclip Eol?*

*R.* Eun Eclip Eol en deus lec'h pa en em gav al Loar etre an Eol hac an Douar.

*G. Hac eun Eclip Loar?*

*R.* Eun Eclip Loar a éru pa en em gav an Douar etre al Loar hac an Eol.

*G. Penos en em form ar Glao?*

*R.* Dre stâncadurez ar c'hounabrennou, a zo forcet gantan avel, pe an digoridiguez eus an ear, a forç d'en em unani en bannac'hou, pere en em gav neuze deut da vea re bonner evit en em zouten en ear hac a goez en glao.

*G. Petra é an Erc'h?*

*R.* Eun dastumidiguez eus a damouigou scorn, meur-bet bian, formet dre galediguez ar c'hounabrennou. An tamouigou scorn-ze, ouz en em unani en nombr bras, hac en eur lezel entrezo calz a spaç gollo, ne formont remet pluennouigou scânv a erc'h, pere a receo eus a bep costez ar sclêrijen, hac a barris güenn-cann.

*G. Penos en em form ar Grizill?*

*R.* En em formi a ra eus a dacadennou glao, pere, en eur dremen ebars en oabrou yen, en em scorn en eur goea. Evelse, ne dlese james bea brassoc'h eguet an dacadennou glao; mes mar dê yen avoalc'h evit scorna ar bannac'houigou dour a rancontr, pe ma en em unan meur a c'hreunen assambles, e teu da vea tevoc'h, hac e form ar greuniou-ze, pere a zo avichou bras evel eur graouen pe cur vi; ar pezh a zo caus peurvuia e ra muioc'h a zroug ar grizill eguet ar glao, eus a behini ar bannac'hou, e lec'h en em unani en eur goea, a zo, er c'hontrol, divizet dre ar resistanç eus an ear.

*G. Petra é ar Gurun?*

*R.* Ar Gurun a zo eur vogueden, pehini o vea rânfermet en eur gouabren, a sco gant nerz ar gouabren-ze; alluc'heden a barris aroc ar gurun a deu eus ar stocaden, pehini a anflam ar vogueden-ze. Ar foultr, pehini eo

ar vogueden-ze anflamet, o tont anfin da grevi ha da zifframma ar gouabren, dre an oll effortchou a ra, a fraill hac a zistruj oll qement a rancontr.

G. *E pet gevren e tivizer ar bed?*

R. E pemp : an Europ, an Asi, an Afric, an Americ hac an Oceani.

G. *Gant piou é bet dizoloet an Americ?*

R. Gant Christoph Colomb, naviguer brudet bras, eus a Gên, er bloa 1492. Bonvila e ramplaças hac a lacas en digas d'ar Spagn, e pelec'h e varvas gant ar chagrin.

G. *Pehini é ar vrassa eus a bemp gevren ar bed e pehini en em gav ar muia a aour hac a arc'hant?*

R. An Americ.

G. *Pehini é ar binvidiea e froueziou an douar?*

R. An Asi : hi eo a fornis ar spiceres, ar mein hac ar plant precius, ha calz a drou all.

G. *E pehini anê e santer ar brassa tomder?*

R. En Afric, brò ar vorianed.

G. *Pehini é ar muia poblet, hac e pehini e zê ar sqiantchou ar muia soignet?*

R. An Europ, ar bianna eus anê, mes ar gaera hac an interessanta. Enni en em gav ar greizen eus an de-readeguez, ar binvidiguez, al lezennou, ar sqiantchou hac ar c'hommerç.

G. *Penos e hanver ar pêvar gostez eus ar bed?*

R. Ar C'hreiz-dez, an Nord, ar Sav-Eol, hac ar C'huz-Eol.

G. *Penos gouzout al lec'h m'en em gaver?*

R. Ne zeus nemet trei ar c'hein d'ar sav-eol; neuze e zeus a gleiz ar c'hreiz-dez, a deo an nord, adrec ar sav-eol, ha dirac ar c'huz-eol.

G. *Penos e hanver an Avelou a c'hoez eus ar pêvar gostez-se?*

R. O henvel a rêr er memes renq : Avel Su, Avel Nord, Avel Reter hac Avel Gornocq.

G. *Petra é ar Môr?*

R. Eur vrasder divuzul eus a zour c'hoëro ha sall.

G. *Perac é sall ha c'hoëro an dour môr?*

R. Dre vescalur meur a vatier, eus a bere e zeo an hollen al loden principal, hac a deu a fonç ar môr memes, gant re all treinet gant rivierou vras en em dol ebars, hac ive c'hoas ar re a zorti eus a voren an douar.

G. *Penos e tivizer an amzer?*

R. Dre ganvet, dre vloa, hà dre vis.

G. *Pet devez en deus peb Mis?*

R. Güenveur en deus 31; C'huevrer, 28 pe 29, herves ma vez ar bloaves; Meurs, 31; Ebrel, 30; Mae, 31; Even, 30; Gouere, 31; Eost, 31; Güengolo, 30; Here, 31; Du, 30; ha Qerzu, 31.

G. *Petra a hanver bloaves ordinal, pe biseost?*

R. Ar bloaves ordinal en deus 365 devez, hac ar bloavez biseost 366 : êruout a ra bep pèvar bloas.

G. *E ped loden e tivizer ar Bloa?*

R. En peder : an Nevez-Amzer, an Hân, an Discar-Amzer, hac ar Gouân.

G. *P'eur e commançont-ii?*

R. Ar guenta a gommanç an 21 pe an 22 a Veurs; an eilvet, an 20 pe an 21 a Even; an deirvet, an 20 pe an 21 a Voengolo; hac ar bedervet, an 20 pe an 21 a Guerzu : tri mis e pad peb sèson.

G. *Petra a ell ar bed da gaout a vrasder?*

R. Ar Bed en deus nao mil lèo drò; ha ma ve ellet toulla an douar dindan hon treid, e ve ret ober eun toull a bêvar mil pemp cant lèo : neuze e ve cavet en tu-all tud hac o deus o zreid ouz bon re-ni, rac an douar o vea rond, en em gav habitet a bep coste.

G. *Comzit din brema eus a eun invantion benac.*

R. An Tàn a voe ar c'henta tra a zizoloas an dud. Plos ha Plox, mibien Acon, eus ar c'hoec'hvet generation, o vea o pourmen var bord eur forest vras,

e tigüeas eun tempest qen horruhl, ma scòe an eil güezen ouz eben, hac e crogas an tân e meur a hini, dre nerz ar frottamant. Plos ha Plox, pere n'o devoa güelet biscoas tam tân, a zônjas e voa ze eur bunion a beurz Doue, hac e redjont en eur voela da lavarat d'o zad ar pez o devoa güelet. Acon a yas gante var ar plaç, e pelec'h ne gavjont nemet glaou maro, mes pere a voa tom. Dre eun inspiration a Zoue, e lavaras d'e vugale qemer daou dam coad sec'h, hac o frotta stard an eil eus eguile : en ober a rejont, ha qerqent o devoe tân.

Er bloa 130 eus ar bed, Jubal a invantas ar fêçon da ober tantennou evit en em loja. Tubald-Caïn a invantas ar fêçon da forji hostillou houarn. Naambleur, e c'hoar, a invantas ar fêçon da nea ha da ober lien.

Er bloa 139, Caïn a gonstruas ar guenta kær, pehini a hanvas Enochia.

Dagon a invantas ar fêçon da hada ar greun, ha da ober an alazr.

Er bloa 2178, an Athenianet a invantas ar fêçon da labouratar gloan ha d'en em zervicha eus a heaul. Mysor, o pourmen var bord ar môr, a zastumas eun nebeut eonen, ha goude er bea tânvêt, e laqas ober haulen.

Qenta marc'h a voe houarnet, a voe hini Childeric, roue a Franç, er bloa 482.

Er bloa 515 e voe construet ar c'henta Melinou e Franç.

Er bloa 830, an Holandisien a invantas an Horolachou.

Ar C'hleyer a voe implijet e Franç, vardo ar bloa 550, invantet tost da Rom, vardo ar bloa 400.

Er bloa 1440, Yan Guttemberg, soudard allamant, a invantas an Imprimeri.

Pell goude, eur manac'h a invantas ar Poultr.

Er bloa 1654, Charles ix, roue a Franç, a ordrenas ma commançe ar bloa ar c'henta devez a vis Güenveur : aroc e commence vardo Pasq.

Ar c'harcul decimal, ar poeziou hac ar muzuriou



nêve a zo ive eun invantion ar gaera. Nac a boan o devoa ar scolaerien guèz goechal, o tesqi carculi dre diner, dre goennec ha dre livr! Brêmâ ne zeus nemet *francou* ha *çantimou*, fêçon meurbet êzet da garculi, hac adoptet gant an darn-vuia eus ar rouantelezou all. Ar poeziou hac ar muzuriou còs a chenche cazi e peb parros eus a Franç : brêmâ ar poeziou hac ar muzuriou nêve a vo hiviziqen ingal dre ar Franç oll.

*G. Comzit din eus ar Franç.*

*R.* Ar Franç a zo divizet en 86 Departamant, 373 Arrondissamant, 2,719 Canton, ha 39,381 Commun. En hirdet e deus 250 lèo, hac en ledandet 245. Bea zo 35,000,000 a bopulation, 75 rejimant infantiri a lignen, 25 rejimant infantiri scânv, 2 rejimant carabinerien, 10 rejimant cuirasserien, 12 rejimant dragonet, 8 rejimant lancierien, 14 rejimant chasserien, 6 rejimant huzardet, 14 rejimant canonerien, 3 rejimant eus ar geni, 1 vataillon pontonnierien, 6 escadron traîn artilliri. Bea zeus ouspen 51 lestr a lignen, 63 fregaden, 108 corveten, brikou bras ha bian, gabaret, goaletennou, batimantchou bian flotill, hac eun niver bras a vatimantchou a vapeur.

*G. Lavarit din eun dra var ar Francisien.*

*R.* Ar Francisien a zo laouen ha hentapl. Carout a reont an oll sqiantchou; tud meurbet vaillant int en oll brezellou, eur garante an tenera o deus evit o mam-brô, hac e rofent an dacaden divea eus o goad evit he difen. Bea int speredus, guiziéc, hac injinus; soudardet calonec ha gracios int.

*G. Despeignit din Paris eun nebeut.*

*R.* Paris e deus tremen 10 lèo drô, diou lèo a hirdet var unan a ledandet. Bea e deus 1,422,065 habitand, 1,208 ru, 120 ru-dall, 41 Pourmenaden, 99 blacen, 12 pors-rivier, 29 qæ, 14 pont, 42 cohi ha placen-marc'hat, 35 feunteun, ouspen 30,000 di; anfin, capital Franç ê, hac unan eus ar re gaera zo er bed.

*G. Hanvit ar Rouantelezou principal eus an Europ.*

*R.* Brô-Zoz, ar Russi Europ, ar Suéd, an Autrich, ar Pruss, ar Franç, Naples, ar Spagn, ar Portugal, an Turqi Europ, an Holand hac ar Beljiq.

*G. Petra é bividiguez ar Russianet?*

*R.* En jeneral int grossier, ignorant ha sovaj e meur a broving, hac en darn all e tisquezont bea civilizet, vaillant, speredus hac injinus.

*G. Petra a leverot-u eus a habitantet ar Portugal?*

*R.* Bea int deread, jenerus, sobr ha dissimul. Tremén a reont evit bea gloriús ha venjançus.

*G. Hac ar Spagnolet, petra int-ii?*

*R.* Pretanti a rêr int roc hac orgouillus; mes sobr int, pridiriús ha paciant er maleuriou. Lavarat a rêr en proverb: roc evel eur Spagnol.

*G. Petra a lavarit-u eus a habitantet ar Suéd?*

*R.* Bea int gloriús ha vaillant, ha carout a reont ar sqiantchou hac al lux.

*G. Petra a lavarit-u eus an Alamantet?*

*R.* Tremén a reont evit bea laborius ha vaillant; mes n'int qet sobr: evel calz a Vretonet, e caront re o banne.

*G. Petra é bividiguez an Turqet?*

*R.* Meurbet e caront ar repos, ha calz douguet int d'al lubricite, d'al lux, d'an impocrisi, ha dreist oll d'an interest. Carantezus int en andret an estranjourien. Ar Sultan a guemer an titrou pompus eus *Doue an douar*, *Sgeud an Eol hac al Loar*, ha *Distribuer Rouantelezou*.

*G. Comzit din ive eus an Holandisien.*

*R.* O bizidi a zo fontet var ar vertuz. Remercout a rêr en o zoues eun urz hac eur c'hundu leun a furnez hac a zo necesser d'ar gout o deus evit ar c'hommerç. N'eus pobl ebet qer propr egueto var ar pez a apparchant dê. Meurbet e caront ar bièr hac ar butuu.

*G. Pez seurt tud é an Italianet?*

*R.* En jeneral int graciús, prudent ha speredus mad

evit ar sqiantchou hac ar micheriu ; mes reprochi a rêr dè da vea venjançus.

G. *Nac ar Zozon, petra int-ii?*

R. Ar gouarnamant en deveus troet anè a grenn d'an navigation ha d'ar c'hommerç; simpl ha serius int, mes mancout a reont a zobrentez.

G. *Pez seurt bividiguez o deus an Africanet?*

R. Tremen a reont evit bea feroç, digalon ha disleal, herves eur beacher benac; mes herves re-all, en em gav meur a bobl er c'hontreou-ze o deus ar memes bividiguez evel a voa e commañçamant ar bed. En dezert Sahara, eur marc'hadour a roas cant mil scoët evit eur banne dour, rac eno e rêr bete tri c'hant lêo avichou hep na ve cavet eur strill.

G. *Roit din eun detaill eus a seiz Burzud ar bed.*

R. 1. Ar Volz caer a eure Arthemis da ober d'e fried, ar roue Mosol, er guær a Halicarnas, capital rouantelez Cari. Ar pez caer-ze en devoa tri droatad ha tri-uguent eus ar c'hreiz-de d'an nord; ar façaden a voa eun nebeut strissoc'h; bea en devoa pèvar c'hant unnec troatad trô. E hueldet a voa eus a seiz troatad ha trêgont, ha bea en devoa c'hoec'h colonen ha trêgont en diabars. Ar philosoph Anaxagoras, eus a Glamozen, pa er goelas, a lavaras : Cetu aze calz a arc'hant chenchet e mein.

2. Templ Jerusalem, construct gant ar roue Salomon, var mene Moria, er plaç ma velas David an æl distrujer eus a justic Doue, eur c'hleze noaz en e zorn. Seiz vloaz e voet ouz en ober. Ar plaç santel eus an Templ-se a voa hir ha ledan eus a ugent ilinad, hac eus ar memes hueldet, eus a behini dec ilinad a voa goloet eus a aour, hac an dec ilinad all eus a vein precius. Joseph an historian a lavar e voa ennàn dec mil cantolor aour, dec mil daul, goloet en aour, hac unan goal vras, tout en aour; ugent mil anaf aour, ha daou c'hant mil arc'hant; pèvar-uguent mil plat aour, ha cant tri-uguent mil

arc'hant, ugent mil scudel aour, ha daou-uguent mil arc'hant; ugent mil ezançouer bras arc'hant, hac anter-cant mil all biannoc'h; dec mil robe goernisset eus a vein precius; daou c'hant mil drompill arc'hant, ha daou-uguent mil instrumant music, en aour hac en arc'hant.

3. Templ ar fals-douees Diana, en Ephès. Distrujet e voe gant Erostrat, pehini, evit laqat comz dioutàn, a laqas an tàm ennàn, 356 vloas aroc J.-C. Pêvar-c'hant vloas e voet ouz e gonstrui. Bea en devoa pêvar-c'hant pemp troatad varnuguent a hirdet, ha daou c'hant ugent a ledandet, soutenet gant seiz varnuguent colonen a dri-uguent troatad hueldet, ornet eus a sculteür, pere a voa bet roet pepini gant eur roue. Ar c'hoad materi a voa cedrès, hac an dorjou cyprès.

4. Ar Vurailou eus a guær Babylon, construct dre uiz Nabuchodonosor: bea o devoa seiz troatad ha pêvar-uguent a ledandet, tri c'hant anter-cant a hueldet, hac ugent léo drò. C'hoec'h caros bras a elle tremen varne êzetamant. Ar guær-ze e devoa pemp dôr varnuguent, tout en coëor massif, pe evit tra, pa bromettas Doue da Cyrus conqeri Babylon, e lavaras deàn: *Me a fraillo an dorjou coëor.* (Isaï. ch. 25. v. 22.)

5. Statu Jupiter Olimpïen, e Pisa. Phidias, sculter calz brudet, a ras aneàn. Pausanias en deus en despeignet evellen: Güelet a rër, emeàn, an doue azeet var eun tron aour hac olifant, memes tra evel ar statu. Bea en deus var e benn eur gurunen a seblant bea olives; en e zorn deo e toug douees ar victor, en olifant, pehini e deus evit coëffeür eur gurunen aour, hac en he dorn clêiz e talc'h eur septr grêt eus a bep seurt metal precius, hac eun erêr er beg. E goëffeür d'an doue a zo aour tout, ha var an ornamantchou oll e zeus poltrejou eus a bep seurt anevalet, ha fleuriou precius meurbet, labouret esqis.

6. Statu Apolon, en Arem, savet etal pors Rhodes, en enor d'an Eol. Qen huel e voa, ma tremene batimantchou

gant o goëliou displeguet etre e ziouc'har. Bea en devoa 105 troatad huedet. Chares, a Linda, disqib Lysippa, sculter brudet bras, a ras ar statu-ze; daouzec vloas e voe ouz e ober. C'hoec'h vloas hac anter-cant goude e voe discaret gant eur grenamant douar, pehini a occasionas eun distruj horrubl er sav-eol, ispicial e rouantelez Cari hac en enezen Rhodes, 225 bloas aroc J.-C. Goude eur spaç a 896 bloas e voe cavet c'hoas seiz cant ugent mil liour boes eus aneân, pere a voe goerzet da eur judean gant Moavia, c'hoec'hvet calif, er bloa 672 eus a J.-C.

7. Pyramidennou carre an Ejipt, savet gant ar pharaonet, rouane ar vrô, ul lèo vad eus Cair, ar gapital. Bea eus teir vras, hac a zo hed 200 pas an eil ouz eben. An hini a zo e coste an nord e deus 600 pas huedet ha 700 pas a ledandet en carre. Bea e voet tri bloas varn-ugent ouz o zével, 360 mil den a laboure varne. Plin a lavar e voe dispignet 7 milion en oignon hac en rabes hepquen, ( An ejiptianet ancien a voa goal debrerien legumach! ) An diou byramiden all n'int qet qen huel na qen teo hac an hini guenta. Ar guelennadurez ancien a ro da gredi e voent grêt evit servicha da volzou-bez da familhou ar rouane, ha penos en hini vrasa e vije deposet corfou ar rouane, goude o maro, hac ebars ar re-all corfou ar rouanezet ha re o bugale. Ar byramidennou-ze a zo bepret en o za; ha marteze e chom eur breton vaillant côs benac c'hoas hac a elfe comz diouto gant gürione, ha repeti gant gloar ar c'homzou mémorabl-mâ a adressas Bonapart d'e arme, er bloa 1797, pa voe conqueret an Ejipt gant ar Francisien vaillant, en eur disqueuz-dê gant beg e gleze ar pyramidennou : « Soudardet ! divar lein ar pyramidennou-ont, pêvarzec » cantvet a admir ac'hanoc'h ! »

G. *Goude bea despeignet ar burzudou bras, comzit din bremâ eus ar burzudou bian.*

R. Eh bien, selaouit : 1. Er c'hoeczevet canvet, Pêr

Alumnus, manac'h italian, a scrifas ar *Gredo* hac an Aviel divea var eun tam paper, bras evel eun diner.

2. Eun den all, qer paciant, a bresantas da Elisabeth, rouanez Brò-Zoz, eun tam paper eus vent eun ivin, var behini e voa scrifet sclêr Gourc'hemennou Doue, ar *Gredo* hac ar *Bater*, hac an dat eus ar bloa.

3. Jerom Faba, bêleg italian, a ras eur pez labour, en beuz, pehini a represante an oll mysteriou eus a Bassion J.-C., hac a zastume en eur graouen guêvez.

4. Grêt en devoa ive eur c'harros eus vent eur greunen vinis, en pehini e velet eun autrou hac eun itron, eur c'hocher o cundui ar c'harros; ha qezeg ouz en treina. Ar marvailhou-ze a voe presantet da Frances 1<sup>a</sup>, roue a Franç. ha da Charles-Qint, impalaer ha roue Spagn.

5. Eun den injinius all en devoa grêt eur gariolen olifant, pehini a guzet dindan diouesqel eur guelienen.

6. Eun autrou, en Paris, en devoa grêt eur c'harros, hac a voa treinet gant c'hoenn.

7. Paul Colomies a lavar bea güelet eun ofreber e Moulins, pehini en devoa chadennet eur c'hoanen beo-bueec ouz eur chaden aour a anter-cant maill, hac a boeze calz nebeutoc'h eguet ur c'hreunen vinis.

G. *Lavarit din perac en deus an Aour ar breferanc var ar metallou all.*

R. Dre ma surpas anê oll en sqüed, en poez, ha dre ar vertu en deus da vea forjabl meurbet, Güelet a rêr ar breuven eus a guementse en alaouradur. Eur physician en deus compodet ec'h eller, gant unan pe zaou onç aour, golo eun neuden arc'hant a zeiz léo ha pêvar-uguent a hirdet. Eun all a lavar e rancfet trêgont mil feillen aour, an eil var eben, evit ober ul lignen a deoder.

G. *Petra zo caus e caver avichou scrituriou, ha calz draou all en diabars ar c'hoad?*

R. Dre ma ê bet grêt an traou-ze, pe blacet re-all en eur drêc'hi ar c'hoad, ha dre ma cresqe, e teuent

da vea goloet, hep bea effacet nac andommajet. Evelse n'en dè qet estonus e ve cavet esqern, scrituriou, ha meur a dra all en diabars eur veen benac.

*G. Pez teoder o deus ar Goez?*

*R.* Bea zo eus meur a vent; mes güelet a rër ive eus a eun deoder surprenus. Var menez Etna, pehini a zislonc tân, e voa eur veen guistin, creus, hac a voa qer teo, ma elle eur messaer en em loja enni ganteoll dénved; 150. troatad a voa enni. Linne a gomz ive eus a eur veen ru-voad, eus a enezen Tenerif, pehini e devoa 34 troatad teoder. Tostic da Strasbourg e zeus eun andret hanvet ar *Vezen Glas*, en pelec'h zo realamant eur veen dreist-ordinal: ellout a rër placi pêvar-uguent den en abri, e qever tauliou bian; en diabars eus ar veen e zeus cabinejou brao. En Americ e zeus eur veen, hanvet *Güezen an Diaoul*, eus a behini ar frouez a ra eun effet estranch: pa zizec'hont ouz an eol, en em fraillont, o tiguéri, hac en em strincont pell gant eun drous qer bras evel a rafe amâ eun nombr bras a fusuillou pere a denfe cazi assambles.

*G. Ha pell-amzer e vev ar Goez?*

*R.* Prouvet avoalc'h ê ec'h ell an dêro beva cant vloas en douar mad, hac an olives tri c'hant. Ar Cedrès eus a vene Liban a vev qeit amzer, qen a zônje an dud ancien ne varve james. Ar Baoba, er Senegal, pehini a deu da gaout bete pêvar c'hant pemp troatad ha trêgont a deoder, a ell beva c'hoec'h cant vloas d'an nebeuta.

*G. Petra é biridiguez pobl Bencin, en Afric?*

*R.* Roue Bencin n'en em disqüez nemet ur vech er bloa; ha neuze, evit renta enor deân, e lazer pemzec pe c'hozec esclav. Pa varv, darn eus ar princet a ve entêret gantân, evit delc'hel compagnunez deân. Entêri a rër ive gantân an darn-vuia eus e habijou hac eus e veubl. Ar goaset ne gredont qet douguen eun habit, nemet recevet o deve ancân digant ar roue, nac ar merc'het

eur robe, qen a ve roet dê gant o fried, pa zemcont. Epad seiz devez goude entêramant ar roue, e ve goueliou caer, ha ne rêr nemet dançal endro d'ar bez.

*G. Comzit din bremâ demeus a bobliou ar Bresil.*

*R.* P'o deve grêt eur prisonnier, mar dê lard, e ve dêbret ractal; mes mar dê treut, e roer deàn eur plac'h d'e zervicha, evit bea e vestrez hac e larda. Pa ve êruet an devez d'e laza ha d'e zêbri, an oll a zo pedet eus ar fest. En em divertissa a rêr, en eur eva ha dançal; ar prisonnier memes a zo eus an ebat; hac elec'h bea trist, e cont, gant eun ær joaüs, ar vaillantisou en deus grêt, hac e lavar dê pere eus o zud, pe o zad, pe o mam en deus bet rostet ha dêbret. Disfia a ra anê memes, en eur lavarat d'an hini a dle en assommi, rêi deàn e liberte, hac en dêbro ên hac e dud. Respont a rêr neuze deàn : Mâ, ni a tialbenno, rac bremaic e vi dêbret te da-unan. Goude o ve lazet, goalc'het, rostet, ha neuze dêbret, ouz en em exorti an eil eguile da vea courajus er brezel, evit ellout ober pourvisionou mad a guig tud evit o fest.

*G. Petra' sinifi ar sclasserezou en em gav e canton Bern, er Souiss?*

*R.* Meneziou scorn int, pere ne deuzont james, hac a zo eus a eun donder incompreapl; p'en em faoutont, e reont eun drous qen horrupl, ma ve lavaret e za tout ar mene da frailla ha da zailla en ær a dammou. Ar beacherien pere zo oblijet da dremen ar meneziou-ze, a ve avichou lônqet er faoutou, elec'h ma chommont da vervel. An dour a zorti eus ar seurt meneziou-ze, a zo ar güella hac ar yac'hussa da eva.

*G. Penos e rêr an eureujou e kêr Goa, en Asi?*

*R.* Pa zemez unan benac, an ozac'h yaouanc hac e vreg en em laqa var eur güele calet, ha neuze o c'herent hac oll dud an eured a vazata anê ar c'hoeca ma ellont. Ar vazadou-ze a zo eul loden eus ar blijadur hac eus ar cher-vad a rêr dê evit o eured.



*G. Petra é bividiguez habitantet ar Guinee, bró vras eus an Afric?*

*R.* Ar vorianed a chom er vrô-ze ne vevont qet peurvuia ouспен anter-cant vloas. Bea eus prénved hac en em stag ouz o diou-c'har, hac o c'hrign betec an ascorn. Goall lubric int : a boan e ve cavet eur plac'h honest er vrô. Oll int feneantet, mêfierien, traitourien hac hep sourci. Goarnissa a reont o diou-har a voalinier aour, olifant, coraill, etc. An dénved er vrô-ze o deus bléo e lec'h gloan, hac an dud o deus gloan e lec'h bléo.

*G. Petra livirit-u eus pobl enezen santez Janned?*

*R.* Aon bras o deus ouz an diaoul, pehini a hanvont *Gregor*. Pa ra curun, ne gred den sortial eus e di, gant aon da vea paqet gant *Gregor*. Ar graguez a zo esclavourezet, hac a ranc ober an oll labouriou rust; ha n'o deus qet al liberte da zèbri gant o goaset. Ar merc'het a ve demet d'an oad a zeiz pe eiz vloas.

*G. Petra a remerqer er sêçon da vera eus a habitantet Loango, rouantelez eus an Afric?*

*R.* Ar grague é a had hac a droc'h an hed; ; servicha a reont o goaset ouz taul, ha goude e zeont da zèbri o restajou d'ar gueguin. Pa fell d'ar roue eva, e son eur c'hloc'h, ha pepini a ranc soubla e benn betec an douar; p'en deve evet, e soner ar c'hloc'h eun eilvet güech, hac e saver er za; rac den ne gred sellet outàn oc'h eva, dindan boan a varo.

*G. Petra é bividiguez habitantet enezen al Laeron?*

*R.* Aroc ma êruas ar Spagnolet eno, an habitantet a zônje ne voa nemeto er bed. Biscoas tam tân n'o devoa güelet, ha pa er güeljont evit ar vech qenta, unan benac diouto a dostàs re dost d'an tân, hac a voe dêvet ha ne gredent qen mui neuze sellet outàn nemet a bell. Ar merc'het a sell evel eur gaerente caout du o dent. O dimezi na bad nemet qeit ha ma qeront. Ar grague ordinalamant a zo ar vestreztet absolu var ar goaset.

O langach a zo douç ha meurbet agreapl; eun estim vras o deus evitàn; en em zellet a reont evel ar muia speredus hac ar goella lezennet eus ar bed.

*G. Pez seurt Goardou en deus Impalaer Matarans, en enezen Java?*

*R.* E bales a zo divoallet gant deg mil maouez, hac o deus officerien evel en hon rejimantchou.

*G. Pez seurt ceremoniou a ve grêt pa ve curunet Impalaer ar Cina?*

*R.* Pa ve curunet, e qemer eun habit labourer hac eun alazr alaouret, hac ec'h hara eun nebeut demeus a eur parq a zo en templ. Eur c'hustum ancien eo, etablisset etouez ar cinais, evit digas sònj d'an impalaer penos e oll vadou ne deuont nemet eus a c'hoezen hac eus poaniou ar bobl, hac e tle evit se e venaji.

*G. Petra veler a gurius e Salisburi, e Brò-Soz?*

*R.* Tour an ilis cathedral, pehini ê an huella eus ar rouantelez. An ilis-se e deveus qen alies a zòr evel a vis a zo er bloa; qen alies a brênest evel a zo a zevez, ha qen alies a bilier evel a zo a heur.

*G. Petra livirit-u eus a brovinç Samogili er Pologn?*

*R.* Lavarat a rër ne all qet eur plac'h bale en nòs, nemet eur c'houlouen alumet e deve en e dorn, ha daou gloc'hic staguet a bep coste outi. Ne zemezer qet ordinalamant eno ar vugale nemet da diégont vloas.

*G. Petra a ra an Albanistet pa varv unan anezo?*

*R.* Mont a reont, an eil goude eguile, da c'houlen digant an hiui maro perac en deus abandonet anê, hac e reont deàn mil gusion evelse.

*G. Petra a gavit-u a ral en Amadabad, en Asi?*

*R.* Goelet a rër eno hospitaliou evit al lapouset hac evit al loened all en em gav clàn, pere a ve panset ha soignet gant ar bayanet.

*G. Pez seurt poan a rër souffr d'al laeron, en kær Achem, en Indes?*

R. James n'o laquer d'ar maro; mes evit ar c'henta laeronci e ve troc'het an dorn betec an azorn; evit an eil e troc'her eben, hac avichou un troad, pe zaou memes.

G. *Expligit din petra è mene Pic-Adam en Indes.*

R. Bea e deus diou lêo a hueldet. Aroc êruout e bâr ar mene, e caver eur blenen gaer, e creiz pehini e zeus eul loaguen goal doun eus ar goella dour a oufet da eva, eus a behini e sorti meur a voas dour, a ziruill e traôn ar mene, hac a form an teir rivier vrassa eus an enezen. Güelet a rêr e qichen al loaguen eun daul men, var behini e zêo merqet troad Adam, pehini, eme an habitantet, a zo bet crouet hac entêret var ar mene. Sônjal a reont ive penos eul loaguen dour sall, pehini zo tost eno, a zo bet formet eus an daelou a scuillas Eva var Abel. Evit êruout var lein ar mene, e ranqer crimpat dre chadennou houarn, pere zo staguet expres evit se, rac anes e ve impossubl pignat eno. Var al lein e zeus eur blenen rond, hac e deus 200 pas.

G. *Pe seurt bividiguez o deus ar C'hanibalet?*

R. Bale a reont en noas, ha ne vailluront qet o bugale, ar pez a ra e zint nerzus ha formet mat; o laqat a rêr en eur baner coton; ha d'an oad a bêvar mis e valeont var o farlochou, hac en em habituont qement da ze, qen a redont buannoc'h eguet den, pa vent rentet en eun oad avancetoc'h. Pep tad a famill en deus e gabanen, e pehini e command. Ar grague, an devez goude m'o deus ganet o bugale, a labour evel an ordinal; mes lavarat a rêr en em laqa an ozac'h er goele, e pehini e rêr deàn chom epad meur a zevez, hed pere e rêr deàn ive observi eur yun rigorius. Ar botret a zo âtao destinet d'ar brezel; débri a reont o enemiet, cazi evel ar Breselianet. Adori a reont an doueou mad ha droug, hac e credont ive en eur vue hep fin eus an ene. Pa varv eur re benac, e reont dançou trist, en eur grial en eur feçon spontus. Mar en deus an hini maro eur morian,

e lazer aneàn evit mont d'e zervicha er bed all : entèri a rër ive gantàn e veublou hac e guy.

G. *Livirit din eun dra benac eus a Keyserlautern.*

R. Er bloa 1789 e voe trapet en eur stanq e qichen ar guær-ze, eur pesq pehini en devoa cazi nontec troatad a hirdet; hac ar pez a voa a guriussa, e zoa eur pez coëor a voa staguet dindàn e vrencqou, var behini e voa gravet en iès grecian ar c'homzou-mâ : *Me eo ar Pesq laqet er stanq-mâ dre daouarn Frederic II, impalaer, ar 5 eus a vis Here 1230*; ar pez a ro da anaout en devoa neuze ar pesq-se pemp cant nontec vloas.

G. *Petra a veler a gaer e Strasbourg?*

R. Tour an Itron Varia. Tost da zaou c'hant vloas e voet ouz e vatissa. Bea è an huella colonen begueg eus an Europ. Pemp cant pévarzec troatad ha tri-uguent a hueldet en deus. En deiziou a rejouissanç e ve alumet goulou partout endro deàn. C'hoec'h cloc'h a voa ennàn; an hini brassa a boeze 18000 livr. An horolach a zo en ilis a zo eun dra ar gaera : merqa ra tro ha distro ar stered, an eol, al loar, ar fallaennou, ar sêzonou, ar vijilou, ar goueliou, ar misiou, an deveziou, an heuriou, ar minutou. Ar pévar oad eus an den, represantet dre figurio convenapl, a dremen hac a zon ar c'hart-heuriou var cléyer bian. Neuze e teu ar Maro, chasseet gant eur C'hrist ressuscitet, pehini gouscoude a bermet deàn sqêi an heur, evit digass sònj e rànqer mervel.

Goelet a rër c'hoas en ilis S. Thomas ar Volz caer en deus laqet Louis xv da zavel d'ar Marichal a Sax. E traon eur golonen begueg e veler an haros armet, e benn curunet a lore, hac en e zorn e vas a gommandamant. Disqen a ra gant eur pas hardi bras ar pazennou a gundu d'ar volz, en eur zellet ouz ar Maro gant eun êr indiffèrant. A deo e mâ ar bobliou var bere en deus goneet ar victor, dindan figurennou convenet. A glêi, ar Garante en daelou, a fix aneàn, hac a ranvers e flamboezen. Var ar

pazennou e veler figur ar Franç, gant eun êr gracios meurbet lia leun a vadelez, pehini eus a un dorn en em efforç da zalc'hel ar Marichal, hac eus eguile e pouls ar Maro, a zo a glêi d'ar volz, an doulsizl en e dorn, pehini a hast an haros da antreal er volz, a zalc'h digor. Er c'hoste all eus ar volz e mâ figur Hercul, a behini ar glac'har mâl ha bras a gcontrast gant hini ar Franç.

G. *N'hac e Lyon, petra a veler a gurius?*

R. Horolach ilis an arc'hescopti. Grêt ê e guis eun tour care, peur-êchuet dre eun dôm, aziouc'h pehini e zeus eur c'hoq hac a anonc an heur en eur digueri e ziou-esqel, hac ocana teir goech. Var ar pondale bian a gurun an dôm, e zeus eur souiss, pehini, qerqent ha ma comaç ar c'harillon da zon, a deu da sqêi an heur gant eur morzol. Var ar pêvar gadran en deus an horolach-se, e zêo merqet cazi qement a zo var hini Strasbourg.

G. *Petra a veler a ral e hear Turin?*

R. Güelet a rêr eur punç hac a zo construet en eur fêçon dreist-ordinal, dre ma ranferm eur pazinier hac a zo eus a eun diribin douç, dre behini ar mulet a ell disqen ha pignat, hep en em rancontri.

G. *Petra a leverot-u din eus a gær Toulous?*

R. Vardro ar bêvarzecvet cantvet e voe formet eur seurt Academi eno, ar gôssa eus an Europ, e pehini an academicianet a bedas ar boetrianet, hanvet er vrô-ze *Troubadour*, da asista en o assamble, an deiz qenta eus a vis Mae. Prometi a rejont eur Violeten aour d'an hini a raje ar goella rimou, ha *Clemauç-Isaura* a deuas, vardro creiz ar c'hozecvet cantvet, evel ar foundatorez neve eus an etablissamant caer-ze, en eur rêi lôd eus e madou evit founti pêvar bris nêve, ar pez a ras pemp fleuren, eus a berê eur Pas-Voulous hac eur Rozer-Gouez aour, eur Violeten, eur Sourcy, hac eur Fourdilizen arc'hant, eus a dalvoudeguez c'hoec'h cant scoë. An A. florian, poetrian ar galonou tener, en deus grêt

eur voerz gaer var ar sujet-se.

G. *Pegueit e vev ordinalamant an anevalet?*

R. Ar Güenan a vev. . . . . 1 bla.

An Alc'hoeder . . . . .	15 ha	18.
An Azen . . . . .	26 ha	28.
Ar Zilien. . . . .		15.
An Eugen . . . . .		19.
An Danvadez. . . . .		12.
Ar Gasperu. . . . .	100 ha	150.
Ar C'haz. . . . .		18.
Ar C'hoq. . . . .		20.
Ar Marc'h. . . . .	25 ha	40.
Ar C'hy. . . . .	22 ha	28.
Ar Vran. . . . .		100.
An Toussec a vev ouspen. . . .		100.
Ar Güiber. . . . .		7.
Al Lapin. . . . .	8 ha	9.
Ar Yar. . . . .		10.
Ar Filip. . . . .	12 ha	15.
Ar Gad. . . . .	7 ha	8.
Ar Pincin. . . . .		28.
Ar Penmoc'h. . . . .		20.
Al Louarn. . . . .		15.
Ar C'holle. . . . .		30.
Ar Vioc'h. . . . .		20.

G. *Hac ingal eo an nosveziou dre ar bed-oll?*

R. Nan, evel e zàn d'en explica déc'h :

E Cayen (Americ) hac e Pondicheri (Indes), an devez hirra a zo eus a	12	heur.
E Sant-Doming (Americ),	13.	
En Ispahan (capital ar Pers),	14.	
E Paris, Dijon ha Carcasson (Franc),	15.	
En Arras (Franc), en Dublin (Irlând),	16.	
E Copenhag (Danemark), e Riga (Russi),	17.	
E Stocolm (capital ar Suèd),	18.	

E Drouthem (Norw.), en Archangel (Russi),	20 heur.
En Ulea (Bothni),	21.
E Torneo (Suèd Bothni),	22.
En Enoutekis, manq an eol a bad dioc'h-tu,	43 devez.
E Warduns (Napoli Suèd),	66.
Er C'hap-Nord (Laponi),	74.
Hac anfin, en enezen Melvil,	102.

*G. Petra eo eur Grenamant douar?*

*R.* Re hir e ve din explica déc'h ar penn-caus eus ar burzud horrupl-se. Lavarat a rin hepquen e zeus en diabars an douar êr, matieriou nombrus hac a guemer tân; eun dour dreist-muzur, pehini, dre e vogueden nerzus bras, ha dre ma ê rànfermet qer stard e fonç an douar, a deu oll da ober effortchou digompren evit caout eun digor. Rac-se eta e zêo an êr, an tân hac an dour a zo caus d'ar grenamant douar. Eur spont ê clêvet comz eus ar maleuriou en deus occasionet. Er bloa 1755, Lisbon, capital ar Portugal, a voe oll dêvet, hac an darn-vuia eus an tiez a voe lounqet e calon an-douar, hac eun niver bras a dud ive. En Americ e zeus güelet crenamant douar epad eur bloa. Anfin, ar maleur-ze a êru re alies.

*G. Petra eo eur Mene a dol tân?*

*R.* Eur mene hanvet isfont tân, e fonç pehini e zeus eur môr a dân, ha pehini, pa deu da zislônqa ar pez a zo ennân, a ra, qent commanç, eun drous an horrupla dindan an douar, qer crén hac ar gurun ar spontussa, ha c'houtelladenou eüzus. Güelet e zeus ar seurt isfontou-ze o tislônqa môriou plom, houarn ha coëor, bêro oll, ha rus evel an tân, eus a ziou lèo hirdet, pere a ruille vardro, hac a zê d'en em goll er môr. Avichou e laqa parissa enezennou el lec'h ne voa nemet môr, hac e tistol goasiou dour bêro, pesqet, mein; anfin, qement tra oll a ell caout. Er bloa 1640 e voe güelet bete diou lèo ha daou-uguent tro a zouar, goloet oll a ludu distolet eus a eun hevelep isfont. Avichou memes e tizec'h

ar mór a ve tost, hac e tislòq neuze dour sall, hac a ravaj an douarou divardrò.

*G. Pehini eo Roue an Anevalet pèvar droatet?*

*R.* Al Leon, aneval caer, terrupl ha jenerus. O vea achappet unan eus e lochen, e Floranç, e laqas ar spont dre oll. Etoues an dud a dec'he, e zoa eur vreg a zougue he buguel etre he divrec'h, hac er lézas da goea. Al Leon a zaillas varnàn evit e zevori; mes ar vam baour a zistro dioc'h-tu, ha leun eus ar garante ardant e deus evit he buguel, en em strinq ouz treid al loen furius: « Rent dîn va buguel, emezi d'al Leon, en eur grial: » rent dîn va buguel, pe devor ac'hanòn ive.... » — Al Leon a sell ferm outi; hac evel ma en devije santet ar glac'har vras eus ar vam dizesperet-se, ha comprenet an nerz eus he daelou, e seblantas bea tenerrèt e garacter farouch, hac e pozas goustadic ar c'hrouadur paour var an douar, hep ober nep seurt poan deàn.

*G. Pehini eo Roue ar Pesqet?*

*R.* Ar Balen, abalamour ma é ar brassa dioute oll. Bea e zeus hac o deus bete daou c'hant troatad a hirdet, hac a furnis bete cant bariqen heaul.

*G. Pehini eo Roue al Lapousset?*

*R.* An Erer, dre e nerz, e gouraj hac e brontidiguez. Lavarat a rêr en deus 18 troatad a ledandet, pa ve digor e ziousqel. Bea zo hac a anlev dénved ha bugale da gass en o neiz da zevori. Eur paysant a lazas unan a doliou perchen, pehini a felveas deàn anlevi eur buguel a bemp bloas. Pa zoat o choaz eur Roue d'al lapousset, e voe decidet henvel an hini en devije nijet an huella. Al Laouenanic paour en em laqas ive var ar renq, ha pa zantas ne alle qet heuill ar re-all (sellit e finese!), cetu én ouz en em bosì sioulic var guein an Erer, pehini, o vea nijet calz huelloc'h eguet an oll lapousset all, a zistroas da zellet outo gant mepris, hac e yas pelloc'h. An-fin, scuis bras, en em lavare outà e-unan: na ellàn mui;



ret è din disqen. Al Laouenanic o clêvet se, a guemer e nij, hac a lavar d'an Erer : Penos, corf lach, n'out qet evit va heuill ! Me ya da vont betec al loar ; mes en em bosî a eure adare var an Erer, pehini n'er zante qet, hac e teujont d'an douar ; hac al Laouenan o qemer c'hoas e nij, na êruas en assamble nemet an divea, hac a grias a boes penn : me meus goneet ar victor, ha ne dòn qet scuis. Ractal e voe hanvet *Roue bian*, en gallec Roitelet, ha dre gorrupcion e voe hanvet *Laouenan*. Alies e goelloc'h an injin eguet an nerz.

G. *Ha quir eo e voerzer ar Graguez ?*

R. Ia, goechal, en Brô-Zôz, pa en devije eun ozac'h c'hoant da güittât e vreg, e vijent cunduet o daou d'ar marc'hat, eur gorden endro d'o gouzoug ; eno neuze eun hucher a laqe ar vreg en goerz, hac an hini a laqe an huella pris en devije anêi. Epad qementse, an ozac'h a vije ornet e benn a guerniel.

G. *Pet Roue a zo bet en Franç ?*

R. Daouzec ha tri-uguent, bete Louis-Philip.

G. *Pegueit emâ pep kær prefectur diouz Paris ?*

R. Cetu amâ hanoyou an departamantchou, ar guæriou prefectur, hac o distanç eus a Paris :

1 Ain.	Bourg.	93 lèo.
2 Aisn	Laon.	31
3 Allier.	Moulins.	67
4 Alpes-Izel.	Dign.	155
5 Alpes-Huel.	Gap.	141
6 Ardech.	Privas.	150
7 Ardenn.	Mezièr.	51
8 Arrièj.	Foix.	162
9 Aub.	Troyes.	36
10 Aud.	Carcassonn.	160
11 Aveiron.	Rhodesz.	142
12 Guenou-ar-Rhon.	Marseill.	169
13 Calvados.	Cân.	55

14 Cantal.	Aurillac.	100 lèo.
15 Charant.	Angoulèm.	110
16 Charant-Inferior.	La Rochel.	124
17 Chèr.	Bourj.	54
18 Corrèz.	Tull.	120
19 Corss.	Ajaccio.	282
20 Coste-d'Or.	Dijon.	75
21 Coste-an-Nord.	Sant-Briec.	96
22 Creus.	Gueret	68
23 Dordogn.	Perigueux.	110
24 Doubs.	Besançon.	82
25 Drom.	Valanç.	122
26 Eur.	Evreux.	22
27 Eur-ha-Loir.	Chartr.	19
28 Finistèr.	Qemper.	124
29 Gard.	Nim.	147
30 Garon-Huel.	Toulous.	150
31 Gers.	Auch.	150
32 Girond.	Bourdel.	130
33 Herault.	Montpelier.	152
34 Il-ha-Vilain.	Roason.	78
35 Indr.	Châteauroux.	59
36 Indr-ha-Loir.	Tours.	51
37 Isèr.	Grenobl.	124
38 Jura.	Lons-Le-Saulnier.	99
39 Land.	Mont-de-Marsan.	180
40 Loir-ha-Cher.	Blois.	40
41 Al Loir.	Montbrisson.	100
42 Loir-Huel.	Ar Punç.	112
43 Loir-Inferior.	Naonet.	87
44 Loiret.	Orleans.	27
45 Lot.	Cahors.	126
46 Lot-ha-Garonn.	Agen.	136
47 Lozèr.	Mand.	125
48 Main-ha-Loir.	Anger.	67

49 Manch.	Sant-Lò.	66 lèo.
50 Marn.	Chalons.	76
51 Marn-Huel.	Chaumont.	57
52 Mayen.	Laval.	58
53 Meurth.	Nancy.	72
54 Meus.	Bar-an-Duc.	56
55 Morbihan.	Goened.	102
56 Mozel.	Metz.	72
57 Niévr.	Nevers.	55
58 Nord.	Lil.	52
59 Ois.	Beauvais.	17
60 Orn.	Alançon.	35
61 Pas-de-Calais.	Arras.	42
62 Puy-de-Dòm.	Clermont.	88
63 Pyreneou-Izel.	Pau.	167
64 Pyreneou-Huel.	Tarbes.	170
65 Pyreneou-Oriental	Perpignan.	175
66 Rhin-Izel.	Strasbourg.	102
67 Rhin-Huel.	Colmar.	97
68 Rhon.	Lyon.	100
69 Sòn-Huel.	Vesoul.	80
70 Sòn-ha-Loir.	Macon.	75
71 Sarth.	Ar Mans.	45
72 Sèn.	Paris.	—
73 Sèn-ha-Marn.	Melun.	10
74 Sèn-ha-Ois.	Versaill.	4
75 Sèn-Inferior.	Rouan.	28
76 Sèvr (Diou).	Niors.	89
77 Somm.	Amiens.	30
78 Tarn.	Albi.	140
79 Tarn-ha-Garon.	Montauban.	140
80 Var.	Draguignan.	230
81 Vauclus.	Avignon.	147
82 Vandee.	Napoléon-Vandee.	104
83 Vien.	Poitier.	74

84 Vien-Huel.	Limoges.	90 léo.
85 Vosges.	Epinal.	101
86 Yon.	Auxer.	37

G. *Comzit din eus a eun invantion benac  
istre ar re oc'h eus hanvet dija.*

R. Al Lizerennou Chiffr Arab,	Er bloa	991.
Ar c'henta Butun digasset eus ar Virgini,		1583.
Ar Paper grêt gant pillou,		1312.
Al Lunedou,		1290.
An Telegraph,		1792.
Ar Patatez,		1775.
Ar Parapluïou,		1680.
Mêlin-Avel en Normandi,		1105.
Horolachou,		760.
Ar Spillou,		1540.
Mouchouerou gouzoug,		1636.
Ar C'hafe,		1656.
Ar C'hafe Chicoree,		1771.
Ar Bloucou ha Crochedou,		1680.
Goell-bièr er bara,		1688.
Tambourinou,		1147.
Nadosiou,		1545.

G. *Petra a lavarit-u demeus ar Vaccin?*

R. Ar Vaccin a zo eun donêzon ar gaera eus a Zoue, rac goechal e vije rentet dall calz a vugale gant ar vrec'h, hac e varve eun nombr immanç gant ar vocenze; mes ar Vaccin a ampech eur seurt horreuriou, ha dre c'hraç Doue ne veler mui a vugale o tont da vea victim eus a eur c'hlénvet qen horrupl. Eur vreg eus a Varseill e devoa pemp buguel; conseillet é da laqat o vaccina, mes hi a refusas crenn. Eur mis goude ar vrec'h a grogas enne, hac e varvjont o femp! Pebes glac'har evit ar vam dezolet-se! Ar valeüruzes a gollas he speret dre an nerz eus e glac'har, ha souden e varvas. Esperomp e tistrujo ar Vaccin grisien ar vrec'h.

G. *Comzit din ive demeus a Alger?*

R. Alger a voa eur vrò a forbanet ha pillerien, atao en brezel ouz an oll. Ar re o devoa ar maleur da vea qemeret gante, a voa reduet d'an esclavach, nemet rançonet e vijent evit calz a aour.

Dindan Louis XIV, an Amiral Duquesn a frottas mad an Algerianet, en 1683, hac en hon amzer, ar Zozon a roas dê ive eur guentel vad; mes reservet e voa d'ar Franç da gaout ar gloar hac an enor da guemer ar vrò barbarze, hac ar 5 eus a vis gouere 1830, ar pavillon a Franç a flotte var touriou Alger. Abaoue ê occupet gant ar Francisien, pere o deus grêt eur guær vrao eus a unan divalo ma voa. Eno e veler ar jârdinou var an tyes.

G. *Goude bea bet comzet din demeus ar vroyou all, grit din ive anavezout hini va brò.*

R. Ar zourcen eus a bobl Breiz en em goll, evel hini an darn-vuia eus ar bobliou all, en devalijen an amzer gòs. Eun autor ancien ( Parthenius ) a assur penos, er bloa 3100 eus a greation ar bed, ar Gallaouet a voa gouarnet gant eur roue hanvet *Britannus*, pehini a voe bisitet gant Hercule, pa dremenas er vrò evit mont d'ar Spagn da gombati Gerion; ha penos an haros bras-se, o vea roet e galon ha plijet d'ar brinces *Celtina*, homàn e devoe eur mab dioutàn, hanvet *Celtes*. Eun historian all ( Diodor ) a lavar e devoe daou vuguel : *Celtes* ha *Gulathes*, eus a bere e zêo deut an hanoyou a *Breizis*, *Celtiqet* ha *Gallaouet*.

Cheffou ar Religion ancien, en Breiz, a hanvet Druset. Ar ceremoniou devot a vije grêt e fonç eur forest vras. Eur men a zerviche da auter, hac eur veen dêro da dapissiti. An antêramanchou a rêt gant calz a vagnifiçañç. Dévi a rêt corf an den marò, ha gantàn ar pez en devoa a brechiussa, e armou, e guezec, e esclavourien, avichou memes e guerent a felvee dê bea dêvet gantàn.

Er fêçon-ze e voa ar stat civil, religius ha moral eus

a Vreiz qent mahomeres ar vrô gant ar Romanet.

Qerqent Cesar a aparis e brô Gall, hac ar religion, al liberte hac an institutionou a zo distrujet. Mes eur pennad goude, forcet da drêi e armou a enep brôyou all, ar Breizis a guemer o re, hac e zint trec'h d'o adversourien. Nomb bras a vloaveziou e zint bet en brezel, avichou trec'hourien, avichou esclavourien.

Eus ar bloaves 402 da 406, ar Breizis-Arvoric a zônjas anfin bea mestrou en o brô, hac e chassejont ar cheffou Romen. Ar Breizis a hanvas hac a anaveas evit Roue *Conan Meriadec*, prinç a Albani, commandant trouplou Breiz, pehini a voa bet hanvet Duc an Arvoric dre urz Maximin an tyrant. Conan, den vaillant ha prudant, goude bea trec'het oll adversourien Breiz, a deuas da vea fondator Rouantelez Breiz, ha Roazon a voe ar gapital.

Cetu amâ ar Rouane hac an Duqet a zo bet en Breiz :  
Conan Meriadec, 1<sup>a</sup> R. er bloa 383; maro 5 bloa goude.

Grallon, er bloa 388; maro er bloa 412.

Salomon, 1<sup>a</sup> a hano, er bloa 405; maro e 412.

Audran, er bloa 412; maro er bloa 438.

Budic, er bloa 438; maro er bloa 448.

Hoel 1<sup>a</sup>, ar Bras, er bloa 448; maro er bloa 484.

Hoel 2<sup>t</sup>, er bloa 484; maro er bloa 560.

Alan 1<sup>a</sup>, ar feneant, er bloa 560; maro er bloa 594.

Hoel 3<sup>t</sup>, er bloa 594; maro er bloa 640.

Salomon 2<sup>t</sup>, er bloa 640; maro er bloa 660.

Alan an Hir, 2<sup>t</sup>, er bloa 660; maro er bloa 690.

Neomen, er bloa 841; maro er bloa 850.

Herupee, er bloa 850; maro er bloa 857.

Salomon 3<sup>t</sup>, er bloa 857; maro er bloa 864.

Goude maro ar roue-ze, ar brezeliou civil a badas 28 vloas, hac ar Rouantelez a chenchas en Ducach.

Alan Rene, 1<sup>a</sup> Duc, er bloa 894; maro er bloa 907.

Alan 2<sup>t</sup>, Barotrez, er bloa 931; maro er bloa 959.

Conan 1<sup>a</sup>, a Roazon, er bloa 982; maro er bloa 992.

- Geoffroy 1<sup>a</sup>, er bloa 992; maro er bloa 1008.  
 Alan 3<sup>t</sup>, er bloa 1008; maro er prison er bloa 1039.  
 Conan 2<sup>t</sup>, er bloa 1039; maro er bloa 1066.  
 Hoel 2<sup>t</sup>, er bloa 1066; maro er bloa 1094.  
 Alan Ferjant, er bloa 1094; maro e Redon, e 1119.  
 Conan 3<sup>t</sup>, an Teo, er bloa 1119; maro er bloa 1148.  
 Eudon, er bloa 1148; maro er bloa 1154.  
 Conan 4<sup>t</sup>, ar Bian, er bloa 1155; maro er bloa 1171.  
 Constança, e verc'h, er bloa 1171; maro e 1201.  
 Artur 1<sup>a</sup>, he mab, massacret gant ar roue Soz, e 1202.  
 Alix, e c'hoar; maro er bloa 1212.  
 Pêr 1<sup>a</sup>, a Dreux, er bloa 1212; maro e 1250.  
 Yan 1<sup>a</sup>, ar Rouz, e vab, er bloa 1257; maro e 1296.  
 Yan 2<sup>t</sup>, er bloa 1296; maro e Lyon, er bloa 1305.  
 Arthur 2<sup>t</sup>, e vab, er bloa 1305; maro e 1312.  
 Yan 3<sup>t</sup>, er bloa 1312; maro e Càn, er bloa 1341.  
 Yan 4<sup>t</sup>, ar Vaillant, e 1345; maro e Naonet, e 1399.  
 Yan 5<sup>t</sup>, ar Fur hac an Duc mad, e 1399; maro e 1442.  
 Frances 1<sup>a</sup>, ar C'haret mad, e 1442; maro e 1450.  
 Pêr 2<sup>t</sup>, ar Simpl, er bloa 1450; maro e 1457.  
 Artur 3<sup>t</sup>, ar Justicier, er bloa 1457; maro e 1458.  
 Frances 2<sup>t</sup>, er bloa 1458; maro e 1488.  
 ANNA, e 1488; demei a eured a 2 Roue Franç; maro e 1513.  
 Cloda, hemerc'h. E 1532, Breiz a voe unanet d'ar Franç.  
 Frances, Dauphin a Franç, ampoesonet dre eun italian.

*G. Goude bea grêt deomp anaveout hon zourcen,  
 comzit din bremà demeus a eun action gaer benac eus a  
 Vreizis.*

*R. Re am be da lavarat, rac a bep amzer Breizis  
 a zo bet potret vad. Cesar a vouie ze ervat. Mes mont  
 a ràn da recita dec'h eun action hac a zervicho da squer  
 evit oll féjou va brois.*

Er 14<sup>t</sup> cantvet, epad eur brezel hir e devoe lec'h en  
 Breiz, Charles de Blois. ha Yan IV, comt a Vontfort, en  
 em dispute var digouez hor brô. Charles de Blois a voa

sicouret gant trouplou ar roue Franç, ha Yan a Vonfort en devoa galvet d'e zicour eun niver bras a zoudardet roue Brô-Zoz, eus a bere en devoa goloet Breiz.

Epad eun nebeudic amzer a beoc'h, pa zônjet bea tranqil, ar Zozon ne rent nemet pilla ar vrô. Calz a bayzântet a deuas d'en em glêm d'ar Marichal a Franç Beaumanoir, pehini a gommande ar Vretonet e Josselin. Ar chevalier Breiziad o zelaouas gant eur gûir despet, hac a bromettas dê justic prompt. Mont a eure ractal da Bloermel, hac e rebechas da Vembro, ar Gouarner Soz, gant calz a zouçter, an dizurzou a goumette e zoudardet, hac e nebeut a respet evit e gomz. Ar Zoz a respontas gant eun êr insolant pehini a choqas ar Marichal, ha goude eun disput bras etrezo, Beaumanoir a broposas da Vembro eur gombat a drêgont Breton a enep trêgont Soz, ar pez a voe acceptet ractal.

Qerqent m'en devoe roet da anaveout da c'harnison Josselin an defi en devoa roet da Vembro, an noblanç oll eus a drouplou Beaumanoir a reqetas caout an enor d'e zicour en eun action qer glorius evit ar vam-brô : ne zoat ambarrasset nemet var ar choaz. Bembro, er c'hontrol, na ellas qet caout etouez e re an nombr a drêgont. Anfin, gant calz a boan e tastumas anê a bep tu. Plaç ar gombat a voe choazet tost da eur veen dêro, hanvet *Dêroen an anter-hent*, rac er memes distanç e voa da Josselin ha da Bloermel. Eun niver bras a dud en em gavas var al lec'h'evit gûelet ar gombat.

Aroc commanç, Bembro, pehini en devoa qeuz, a lavaras da Veumanoir e zoa en em angajet re scânvic en eur seurt affer, hac e crede e voa goelloc'h gortoz consantamant o rouane, qent eguet sqêi taul. Mes ar Vretonet, impaciant d'en em vuzuri ouz ar falserien, a grias oll assambles ne voant qet deut e placen ar gombat evit retorn hep gouzout *piou diouto pe diouz ar Zozon o devoa ar gaera mestrez*; na memes, d'en em denna hep



combatti, a vije en em laqat goapât hac en em dizenori dirac ar guenvrois. — Ho frouden, eme Bembro, a ya da laqat Breiz oll e caon, ha ne ramplaço bigen an dud vaillant eus a bere e ya da vea privet. — Felveout a ralz da ze, eme Beaumanoir, ar gouraj o luguerni en o zaoulagad; rac na zit qet da zônjal em be amâ ganén ar vaillanta eus a chevalierien Breiz : ne domp nemet ar re nebeuta. An autrone a Laval, a Rochefort, a Loheac, ne maint qet ganemp; mes an oll brezellerrien vaillant am accompagnuneca, a zo avoalc'h hepquen evit ho trec'hel.

Neuze e voe roet ar signal, hac ar gombatterien, renjet en diou renq, en faç an eil d'eguile, a zaillas gant furor var o adversourien. Dabord, an avantaj a zeblante bea evit ar Zozon. Ar Vretonet a gollas Geoffroi de Mellon ha Geoffroi Poulart, o daou ecquierien, pere a voe lazet a dolliou lanç; ar chevalier Yoen Charruel, Caro de Bodegat, hac an ecquier Tristan Pestivien, a voe discaret a dolliou morzol, ha grêt prisonnerrien dre Bembro. Goude calz a effortchou, en pere e tisputet ar victor gant poan vras, hac o vea scuis meurbet hac accablet oll gant an domder, en em separjot eus a bep coste evit gemer halan hac eu em refresqi eur moment.

Beaumanoir, o velet e dud diminueet dre ar c'holl eus a bemp dioute, a erbedas ar re-all da redoubli a gouraj. Neuze an ecquier Geoffroi de la Roche o vea lavaret deân penos ma vije armet Chevalier, e santje redoubli e nerz hac e gouraj, ar Marichal a autreas deân ractal an urz eus ar chevaliri, ouz en exorti da ober ervad evit heuill exempl e dad còs Budes de la Roche, pehini a voa en em vrudet bras en brezeliou an Douar-Zantel.

Ar momentic-se a beoc'h a voe heuillet eus a eur stocaden terruploc'h eguet ar guenta. Beaumanoir en em disquezas vaillant dreist musul; mes blesset e voe, hac ar c'holl eus e voad o vea en alteret terrupl, e c'houlennas

da eva ; neuze è e rêas Geffroi du Bois deàn , unan eus e vignonet , ar respont brudet-mâ : *Beaumanoir* , *ev da oad* , *ha da zec'het a dremeno*. Ar seurt rebech-se a biqas enor ar Marichal , pehini a guntunuas da gombatti gant calz a gouraj ; gouscoude , accablet dindan an nombr , e voa var ar poent da vea grêt prisonnier dre Bembro , pehini a grie varnàn en em renta , er moment ma voe lazet ar chef Soz-ze gânt Alan K'anrais , ecquier Breziad , pehini a roas deàn eun tol lanç , hac en discaras mario d'e dreid , al lanç o vea antreet en e lagad hac en e empen. E varo a laqas an dizurz etouez ar Zozon , hac ouспен , a ziangajas eus o c'homz an tri Breton , Charruel , Bodegat , ha Pestivien , pere a voa prisonnierrien ; hac o vea bet delivret , e qemerjont pers er gombat. An ecquier Guillou de Montauban a êchuas , dre eur finesse brezel , da laqat ar Zozon en dirout : sailla a eure var e varc'h ; hac o vea grêt ar vãn da guemer an tec'h , evit o zenna var e lerc'h , e reas troyou ha distroyou cam , hac e teuas d'ar c'haloup d'en em vesqa en o zoüez , en eur rànversi anê hac a deo hac a glêi a doliou morzol. Ar Zozon a gollas couraj neuze ; hac ar re ne voent qet lazet er gombat , a voe grêt prisonnierrien , ha cunduet da gastel Josselin dre ar Vretonet triomphlus.

Cetu aze ar recit fidel eus ar gombat memorabl-ze , pehini ne vo birviquen ancounac'hêt etouez ar Vretonet , na gant ar Zozon memes.

Ar gombat-mâ en devoe lec'h er bloa 1350 , d'ar zadorn aroc sul al *Lætare*.

G. *Contant bras oun eus ho recit , mes carout a rafen clêvet henvel ar Vretonet vaillant-se.*

R. Cetu-int amâ : — CHEVALIERIEN :

Robert de Beaumanoir. \* — An A. de Tinteniac. \* — Gui de Rochefort. — Yoen Charruel. — Robin Ra-guenel. — Huon de Saint-Yvon. — Caro de Rodegat. — Olier Arrel. — Geffroy du Bois. \* — Yan Rousselet.

## ECUIERIEN :

Guillou de Montauban. — Alan de Tinteniac. \* — Tristan de Pestivien. — Alan de K'anrais. — Olier de K'anrais. — Louis Goyon. \* — Geoffroy de la Roche. \* — Guyon de Pontblanc. — Geoffroy de Beaucorps. — Mauriç du Parc. \* — Yan de Serent. \* — N. Fontenay. — Huguet Trapus. — Geoffroy Poulard. — Mauriç de Tronguidy. \* — Gestin de Tronguidy. \* — Guillou de la Lande. \* — Olier de Monteville. — Simon Richard. — Guillou de la Marche. — Geoffroy de Mellon.

Ar steredennou a verq ar re o devoa c'hoas o nizien bian beo aroc ar revolution.

Eur groas a voe savet goude er plaç-se, mes distrujet é bet cazi oll er revolution. Lenn a rêr c'hoas gouscoude e lizerennou ancien, var ar sichen a zupporte anèi : *Da remor perpetuel ar GOMBAT A DRÉGONT, goneet gant an A. Marichal DE BEAUMANOIR, er plaç-mâ, er bloa 1350.*

— Louis XVIII en deveus laqet sevel eun azroëez ar c'haera er plaç-se memes, evit renta enor d'ar Vretonet vaillant pere a vouezas exposi o bue evit savetât o brò eus a valiç o adversourien, ha da zigass da zònj d'an oll Vretonet da zont d'o imita, mar bez ezom.

G. *Piou en devoe da zisput evit beza Duc a Vreiz?*

R. Yan a Vonfort, hanaveet evit Duc a Vreiz, dre gombat Alre, an 29 a vis goengolo 1365, a c'honeas var Charles de Blois. Gonit a reas Breiz oll, hac er meritout a rê dre e furnez goude ar victor. Ober a eure en e vrò evel a eure goechal Herri IV en Franç. Ar pez a gresq c'hoas e c'hloar, e zeo m'en devoa da gombati an daou buissanta general eus an Europ : Duguesclin ha Clisson. Emàn, dre e grueldet, a voe hanvet *ar C'higuer*.

Famill Monfort, assuret var an tron dre e merit, e deus possedet an Dugach a Vreiz bete ma é bet unanet d'ar Franç er bloa 1524.

G. *Petra voe caus m'en em roas Breiz d'ar Franç?*

*R.* Ar brezelliou cuninuel, hac ar garante vras e devoa an Duques ANNA evit e fobl, pere a gare eguis eur vam dener. Ar Brinces-se, leun a gouraj, a vertu hac a garante evit Breizis, o velet na elle qet rezista ouz ar Franç, hep brêvi e fobl, en em rezolvas d'en em sacrificia evit ar Vretonet, en eur dont da zemei da Charles VIII, roue a Franç. Mes, evit se oll, ne voe qet bet c'hoas unanet Breiz d'ar Franç nemet goude maro Charles; neuze ANNA a zemeas da Louis XII, roue a Franç, dindan pehini e voe neuzet unanet evit mad.

*G. Ha chom a rejot fidel d'ar Franç?*

*R.* Er bloa 1589, calz a guæriou eus a Vreiz en em zisclêryas evit an alianç a voa a enep Herri IV, roue a Franç; mes ar prinç mad-se, tad e oll sujedet, ha mignon bras d'an dud divar ar mêtz, da bere e promete *ar yar er pôd*, a deuas a benn, dre vadelez e galon, da e'honit calonou ar Vretonet, pere na rejont nep effort evit en em attachi deàn, hac abaoue ec'h eller lavaret evit güir e zeo bet atao ar Vretonet fidel d'ar Franç.

*G. Piou en deus hanavezet da guenta Herri IV evit Roue a Franç?*

*R.* Parlamant Breiz : Enor deàn.

*G. Petra a velet a gurius e Petersbourg, er bloa 1740?*

*R.* Er gouân vras eus ar bloa-ze, e voe grêt eno, gant ar brassa reiz, *eur Pales Scorn*, pehini en devoa 250 troatad anter a hirdet, var 16 anter a ledandet, hac 20 a huedet. Eus a rivier vras an Neva e voe tennet tout ar scorn-ze, pehini en devoa 3 droatad teoder. Dre ma tennet anê deus ar rivier, e vijent tailet evel mein benerez, ha pa vijent placet, ec'h arozet anê gant dour a bep liou. Dirac ar pales-se e voa placet 6 canon scorn, teurniet, gant o affujou hac o rojou, grêt ive gant scorn. Carguet e voent a boultr, hac e tenjot gante.

*G. Comzit din ivez eus a Feunteun-vozeley.*

*R.* Ar Feunteun-ze en em formas ouspen cant vloas

zo, dre eun tourmant horrupl. Eun ozac'h, spontet gant an tempest, a zortias eus e dy, hac a reas eun toull en douar; qerqent e saillas ac'hane eul lomen vras a zour, gant qement a nerz, ma voe discaret d'an douar; hac o vea bet goude tostêt gant eur c'houlouen, an dour en em alumas, hac ar feunteun a leusqas flamou bras a dân. Abaoue e deus conservet ar memes vertu, ha bete zo qen ma laqa en glaou ar brassa tammou coad glas; ha gouscoude an dour-ze ne deveus nep tomder ebet, hac a zo memes qer yen evel an douriou all.

G. *Comzit din eus a eur Breton vaillant benac.*

R. Re am be da ober, ma rancfen henvel an oll Vretonet o deveus disqezet en peb amzer eur gouraj dreist-ordinal. Ne hanvin nemet nebeut :

Primoguet, Duguay-Trouin; Guichen, Ducouedic, Lacross, Cornic, Surcouff, Bisson, etc. — Duguesclin, La Tour d'Auvergn, den eus a eur sqiant vras, hac en deus scrifet var sujet hor brò; en henvel a rejot *Qenta Grenadier a Franç*, bete ma voe lazet er bloa 1800. E numero ne voe qemeret gant den er rejimant, ha pa vije grêt an appel, an oll grenadourien a responte a ur voez : *Maro er C'hamp a enor!!!* — Pascal, pehini a grie var e Vretonet, e Lutzen : Dao-ta, potret, qen a danfoeltro.

Er bloa 1828, Bisson a gommande eur vatimant, e pehini e talc'het forbanet prisonnerien; souden ê attaqet gant 3 lestr preyserien, eus a 70 den a eqipach pepini. Bisson n'en devoa nemet 14; mes en em rezolvi a ra da rezista. Pa velas e saille ar forbanet d'an abordach, ha na chomme gantàn nemet 9 den hepqen, ec'h ordren d'e dud en em sovetât, rac decidet e voa da zêvi e lestr, ha da zailla gantàn en ear, qent eguet en em renta d'ar scurt tud. Mil boan en devoe d'o laqat d'en abandoni : oll e felvee dê mervel gantàn. Anfin, tec'hel a rejont, ha ne chomas er vatimant nemet Bisson hac e bilot Tremintin. Emàn, indignet oll a eneb ar forbanet, hac a admiration

evit e gabiten, a dou e varvo gantàn. Laqat a ra e zorn en e hini, hac an harros Bisson, gant e zorn all, a laqa an tân er boudrieren. Ractal e saill ar vatimant en ear, gant eun drous an horrupla, hac e tisparis Bisson evit james !.... Tremintin a voe stringet var bord an od, evel dre viracl, mes brêvet oll hac estropiet meurbet; eno e voa ive distolet 70 eus a forbanet lazet.

Qerqent ha ma voezas ar ministr qement-mâ, e ti-guemennas da Tremintin mont d'e gaout, pa vije yac'h avoalc'h evit se. En effet, Tremintin a yas pa voe pare; hac evel m'en em bresantas, e voe diguemeret evel eun harros. Ar Roue, atao prest da recompansi ar vaillantis, en em hastas da enori an den courajus-mâ demeus a vercou e justiq hac eus e vadelez.

C'hoar Bisson e devoe 500 scoët pansion. Statu Bisson a zo savet var beg eur golonen, en Oriant. Bisson a voa eus an Oriant, ha Tremintin eus a Enez-Vaz.

*G. Comzet oc'h eus din eus a Voaset vaillant; mes, ha ne zeus qet bet ivez Merc'het a galon?*

*R. Evel evit ar goaset, em be calz da henvel; mes ne gomzìn nemet eus a beder, eus a vroyou differant.*

1. Janned d'Arc, leshanvet Güerc'hez d'Orleans, eus a vilajen Domremy, merc'h da eur paysant.

Ar Franç a voa neuze en eur stat trist, dre ar victoriou a c'honee ar Zozon en hon rouantelez memes. Janned, evel dre eun inspiration divin, en em sel evel galvet gant Doue da savetat ar Franç ha da chasseal an enemiet, a voa var ar poent da guemer Orleans.

Mont a eure eta qerqent da gaout Charles VII, roue a Franç, hac o vea expliqet deàn sclêramant ar sujet eus e demarch, en em laqa e penn e drouplou, hac ec'h an-couraj an oll zoudardet, dre he exempl, en eur chasseal ar Zozon. Cundui eure neuze ar roue da Rheims, evel m'e devoa promettet, evit laqat e sacri. Mes an haroses-mâ a voe qemeret e siëj Compiègu, ha casset da Rouan,

e pelec'h e voe condaonet evel eur sorcerez da vea dêvet en beo, er bloa 1451, en mez he adversourien milliguet. Souffr a eure eur maro qer cris ha qen horrupl gant eur gouraj ar vrassa.

Louis XVIII en deus grêt sevel statu Janned d'Arc en Orleans. — An A. Penguern, coronal Breton, a eure d'e rejimant arrêti dirac ar statu-ze, hac a guemeras an drapo evit he zaludi dre deir güech.

2. Eur guær a voe qemeret dre assot; ar general adversour, aroc ar pillach, a bermetas d'ar grague anlevi ar pez o devoa a breciussa ha sortial a guær. Souden e veljot greg commandant kær o sortial gant e goas var he diouscoas, hac an oll grague all ouz he heuill er memes sêçon. Ar general adversour, carguet a admiration evit eun action qer caer, a eure graç d'an oll.

3. Er bloa 1522, ar Zozon o vea qemeret Montroulez dre drahison, a bille hac a laze an habitantet. Eur plac'h a gampr eus ar Ru-Vras, chommet he-unan en ty, a zastumas merc'hed all ganti; hac o vea digoret scoutill ar c'haio, a voa doun bras ha leun a zour, e lêzas an nôr anter-digor, en hevelep sêçon, dre ma antree ar Zozon a vanden, e coent an eil var eguile er c'haio, en nombr a ouspen 80, e pelec'h e voent beuzet. Anfin, an ty a voe forcet, hac ar plac'h jenerus-mâ o vea tec'het d'ar c'halatres gant e c'hamaradezet, a voe poursuet gant ar Zozon, ha stlapet dre ar prennest var ar pave. Pebes domaj n'en dê qet bet conservet he hano!

4. Castel Montroulez, assiejet, a vãnqe a voed; ar general enemi, o c'houzout e voa an itron a Rosampoul, greg ar gouarnner, prest da wouilloudi ha dastumet er c'hastel gant he fried, a eure teurel dêi pep seurt meuzou mad; mes ar gouarnerez courajus a laqas o disteurl er mêz, en eur lavarat: « Ar pez zo mad evit va fried hac a evit ar garnison, a zo mad avoalc'h evidon. »

G. *Peseurt Rouanezet zo bet e Montroulez?*

R. Mari Stuart, rouanez Scoç, brudet bras dre he c'haerdet, he speret hac he maleuriou. Diambarqi a eure e Montroulez, er bloa 1548, en eur vont da Baris evit demei da vab ar roue a Franç. An A. Rohan, e penn an noblañç, a recevas anêi o sortial eus ar vatimant. Goude an *Te Deum*, canet en ilis ar Vur, e yas da goùent S. Dominic, e pelec'h e voa ar pales; mes o tremen dre vanel ar Prison, ar pont a grevas dindan boez ar gavailliri. Ar Scoçis en em laqas da grial : trahison, trahison! mes an A. Rohan, pehini a valee tost da litier ar rouanez, a brononças a boez penn ar c'homzou-mâ : *Biscoas Breton na eure trahison*. Epad an daou devez a dremenas ar rouanez e Montroulez, e voe dôrojou kær divudurennet. — Piou en devije sônjet neuze e rancje eun deiz ar brinces gaer-ze, goude bea bet destumet 19 vloas er prison, dont da goll he bue var eur chaffot! Ah! bepret e vo clêmet Mari; mes he fersecutorez jalous a vo da viqen execret.

An 20 eus a vis gouere 1831, Dona-Maria, Rouanez Portugal, oajet a 13 vloas, a êruas e Montroulez, goude bea dianbarqet en Brest, evit mont da Baris. Rentet e voe dêi an oll enoriou, dre bep seurt mercou a respet hac a interest tener a guemeret evit eur rouanez qer yaouanc, pehini e devoa dija eprouvet calz a drouqç'hraçou. Eur solanite vras a voe en deiz-se e Montroulez.

G. *Petra a velet a vras goechal e Montroulez?*

R. Gouel ar *Pantegot*. E mis Mae en em assemble kæris er C'hastel, pehini ne voa qet closet neuze evel bremâ, hac e velet eno ar Mêr hac oll pennou kær, ar vourc'hisien, paour ha pinvidic, hac o oll famillou, ar varc'hadourien frouez anfin, evel en eur pardon. Ar botret a vije recevet chevalierien d'an oad a 7 vloas, mes ne dennent nemet da 18. En beg Torossen *Pantegot* e placet eur rondachen, var behini e voa eul lapous coad, hanvet en gallec *Papegot*.



Neuze ar Mèr, o vea grêt laqat pep tra en urz, a c'halve ar chevalieren pere hepqen o devoa droat da denna. Eno neuze, pep chevalier, armet eus e fusuill, a zeporte an urzou. Qerqent ar Mèr a rê sin d'ar c'henta chevalier da denna; ha pepini, herves-e renq, a glasqe trapout al lapous. P'en devije eur chevalier ar boneur da ziscar ar Pantegot, e save neuze eur c'hri a joa, hac e vije proclamet *Roue ar Pantegot*. Ractal e tiredet en kær, en eur grial a boez penn: Hen-a-hen en deus discaret ar Pantegot. Ractal e vije lojet eur variqen win e ty ar Roue. Ar Mèr, a goste deàn *Roue ar Pantegot*, cheffou kær, hac eur bobl immanç, en em rente en ilis ar Vur, e pelec'h e vije canet eun oferan solanel, hac e vije roet neuze mil livr en arc'hant da Roue ar Pantegot, pehini ive, d'e dro, a roe eur repas caer. — An divea roue a voe Alanic an Audren, qere, eus a ru ar Vur.

G. *Peseurt marvailhou a gontet goechal e Montroulez?*

R. Comz a rêt eus a *Deuz ar Pouliet*, eus a *Gariguel an Ancou*, eus ar *Ganneres-Nôs*, eus a *Bot e voutou coat*, eus ar *Buguel-Nôs*, eus ar *Gornandonet* a voa dindan ar C'hastel o conta o arc'hant, hac a draou sot evelse, pere a rê aon d'ar vugale, hac avichou ive d'ar re vras. Bea e voa c'hoas eur brinces e feunteun *Campr-al-Livet*, hac eun all e feunteun *S. Nicolas*, pere a deue en o frenrestou d'an tol a greiz-de. Adrec forn *S. Martin* e zeus ive eur feunteun, e pehini e chenche an dour en güin deiz gouel *S. Martin*, d'an tol a anter-nôs, etc. — Qementse n'en dê qet estonus, rac eur pennad so e zeus bet tud speredus avoalc'h evit daoulina dirac eur *Golen*, en tu-all de Beuc'hoat.

G. *Ha bea zeus eun dra gurius benac da velet e Montroulez?*

R. Goechal e velet Tour caer Itron Varia ar Vur, eus a behini ar men qenta a voe pozet er bloa 1363, deiz Anter-Eost. Er bloa 1806, an 28 a vis meurs, e fraillas

ar peder golonen e zoutene, hac e coeas an Tour, burzud Montroulez, vardro un heur ha qart goude creiz-de. Pévar den a voe lazet dindan. — Ar pors-môr hac ar rivierou, oll e mein beneres, ar pezh ne veler qet memes er guæriou vrassa, a zo caer. — Pebes domaj ne zeus qet a blomennou evit founnissa dour e pep qartier ! Istre ma ve eun ornament, e ve ive eus ar vrassa utilite.

Aroc êchui da gomz a Vontroulez, e lavarin penos hon tadou côs, goude bea bet clêvet gant o re-int, a lavare e voa bet güechal eur merventi qen horrupl, ne voa chommet nemet ur c'holistr evit serri an ilis.

Er bloa 15... e voe eur vocen e Montroulez, pehini a anlevas eun infinite a dud. Güelet hon eus memes, en bêred S. Vaze, men-be ar breur Joseph, cabucin, maro gant ar vocen-ze.

Ar c'hélnved lovr a zistrujas ive eur bobl immanç er memes kær, pell-amzer zo, pa ê güir ar vêrejou nac an ilisou ne sufisent qet da receo ar c'horfou, hac e rancjot en emzervicha eus a eur parq e penn hent S. Augustin, en digor hentchou Brest ha Castel, a glêi, cazi en faç da hent Castel, hac a hanvet *Béret al Lovrezet*. Qent ar revolution, procession ar Rogationou, goude eun oferen canet e chapel S. Augustin, a yê da vêret al lovrezet, e lec'h ma canet al *Libera* evit ar re a voa entêret eno. Da zezirout ê e ve savet eur groas eno, var behini e ve merqet en memor a betra.

Er bloa 1832, ar c'holera-morbus a eure ive eur ravaj spontus e Montroulez.

G. *Comzit eus a Ilis hac eus a Dour an I. V. ar Vur.*

R. Evit pignat d'an ilis e voa 37 pazen mein benerez ar c'haera, labouret e mouleür. Digor ar pazinier a voa eus a 16 troatad; a deo tyes, a glêi eur gardecor superb. An Tour a voa evel hini Castel, mes brassoc'h ha caeroc'h ornet. A uz dôriou ar porchet e voa ar Verc'hez en eur groten dindan goer, ha d'he zouten, pennou an

3 breur o devoe ar marc'hat da zével an Tour. A bep tu e voa S. Yan Avieler ha S. Luc. Ebars en Tour e voa ar gampr qenta, diblenchodet ha didreustet pell a voa; a uz, cambr an horolach; huelloc'h cambr ar soniri; hac aziouc'h, cambr ar c'hleyer, elec'h ma voa ar C'hloc'h-Bras, var behini e voa bulzun ar güiaderien, pere o devoa roët ar c'hloc'h caer-ze d'ar Vur, pa deuas o breuriez eus a S. Vaze d'ar Vur; cloc'h ar Verc'hez; cloc'h an Drindet, ha cloc'h ar Zalud. Ac'hane e pignet d'ar garidou huella, a belec'h e velet kær ha tro-vardro. En diabars an tour begueg e voa cloc'h bras an heur, hac 8 cloc'h a garillone bep quart-heur, hac a zone goechal an *Ave Maris stella*, bep heur. Daou gadran a voa : unan a roe var ru ar Vur, hac eguile var plaç ar Pesqet. Garidou caer a rê an drò d'an ilis, en diavès hac en diabars. Dre an tu clèi ec'h antreet en ilis; a deo e voa auter S. Rene ha S. Guillerm; ty béleg an ofern guenta, sacristiri ar chantret hac ar c'holistret, an hini creiz, hac hini ar chaloniet, o zeir a uz traòn hent au hospital; goude e voa pazinier an ogrou; pelloc'h, auter ar C'hrist-Bras a zo en ilis S. Vaze. E penn an ilis, a deo, auter an Itron Varia Zelivranç; a glèi hac e penn ar c'hœur, an Auter-Vras, ornet a uz eus a c'hardou marbr du, labouret esqis. E coste an abostol, an Drindet; a goste d'an auter, S. Louis, hac e coste an aviel S. Marc. A goste, en eur groten, Itron Varia ar Vur, pehini a zigoret deiz Gouel an Drindet, pardon ar Vur, ar pez a rê d'ar bobl diredec en foul d'e fedi ha da admira an traou caer a voa enni. A goste e voa auter ar Sepultur. Prennestou an auter a roe var digor banel ar Pasteziou.

Ar c'hœur, aroc 1788, a voa evel hiniatedral Castel, ornet a sculteür caer ha fin, mes distrujet e voent oll, ha ramplacet dre labouriou commun. Eun érer bras, en coëor alaouret, a zerviche da lutrin, ha tri leon coëor a orne e zichen. Tri lampr arc'hant a voa e traòn an

Auter-Vras, hac eun all dirac ar Verc'hez, pere a vije alumet nòs-de. Aziouc'h d'ar c'hœur e voa tour cloc'h *Guillaouic*. Etal ar pincin marbr ru-güen, oc'h antreal en ilis, a deo, e voa eun dourellic men K'santon, e pehini e voa eun demezel, hac ermes eun æl ouz e c'homunia. A uz d'ar prennest grillet, e lennet e lizerennou aour : AVOYE DE COATANSCOUR. Bemde e teue d'an ofern guenta d'ar Vur, hac e tigasse en e davancher qig ha bara da rêi d'ar beorien. Heuillet eun deiz gant he mam, e tispacas e davancher, ha na goeas nemet fleur. Ar vam coleret, e dastumas en tourel Coatanscour, gant difen da rêi dêi da zèbri : *æ* es eun æl a deue bemde d'e mezur eus ar bara celestiel. Evit merq eus a guementse e voe placet an dourellic en ilis ar vur. Er güelet hon eus.

E Lann-Festour, var hent Sant-Yan, a glêi, e veler Croas ar Rouanez, var sichen pehini e pozas an duqez Anna he zreid, pa zisqennas eus al litier, goude bea partiet eus a ilis ar Vur, da vont en pelerinach da Sant-Yan-ar-Bis, er bloa 1506, evit he foan daoulagad. Mercou he zreid a veler c'hoas var ar sichen.

Eun nebeut mad pelloc'h, a glêi, aroc êruout e Croas ar Bis, e zeus eur men bras, harpet ouz ar c'hleun.

Hon tud còs a gonte demp penos, eur goas o vea ét da laeres eur fagoden lann, en erreas gant eur gorden, en eur ober dre voapêrez var ar fagoden eur groas gant e vis, hac o lavarar : Al loar d'am lounco, ma na rân eun tân mad gant va fagoden. N'e voa qet êchu e c'her, ma voe chenchet ar fagoden en eur men, hac ar goas lounqet gant al loar. — Sellit ouz ar men-ze, hac e velot ar groas ha fêçon eur gorden.

E Castel e veler Tour caer Creiz-Kær, hac er gathedral Bolz superb an A. Visdelou, escop.

Tost da Huelgoat e zeus eur roc'hel vras hac a ell un den hepqen da laqat da vouja.

G. Comzit din ivez deus Brest.

*R.* Bea ê, hep douetanç, ar c'haera pors-môr eus ar Franç, hac ec'h eller en assuri, ar c'henta eus ar bed, dre an antre estonapl eus ar rad, herves rapport an A. Cornic, eus a Vontrouez. Mes na ellàn qet niveri amâ an oll-draou burzudus a veler er guær-ze nac en Breiz : calz re hor be da scrifa.

Goechal, pep den neve demeeet, a voa oblijet d'en em stlepel er môr an deiz qenta ar bloa. Nac a intânvezet, ma n'o devije qet gouezet o goaset qèz neuzial !

*G. Petra a veler a derrubl vardro enezen Sizun?*

*R.* Beg ar Raz ; ne zeus netra a spontussoc'h eguet ar passaj horrupl-se ; evelse, ar vartolodet qèz, ouz en tremen, ne vângont qet da lavarat :

Va Doue, va zicourit da basseal ar Raz,  
Rac va lestr a zo bian hac ar môr o zo bras.

Nep na zent qet ouz ar stur,  
Ouc'h ar garrec a rai sur.

Biscoas den na dremenas ar Raz,  
N'en devije aoun pe gloas.

*G. Petra a leverot eus ar guær gôs a Is?*

*R.* Ar guær-ze a lavaret a voa er plaç ma e mâ bremâ Douarnenez, herves Pieres Baud hac an historianet all ancien eus a Vreiz, hac a zupposer bea bet sumerjet vardro fin ar bêvare cantvet, da lavarat ê, bremâ eus ouspen 1500 vloas. Güelet a rêr c'hoas cos mogueriou, pa ve izel ar môr. — Lavarat a rêr :

Abaoue ma ê beuzet ar guær a Is,  
Ne zeus qet cavet par da Paris.

*G. Petra a velet goechal a gurius e Qemper.*

*R.* Goechal, deiz gouel Santez Cecila, da ziv heur goude lein, e pignet er garidou a zo aziouc'h an nôr dâl, el lec'h ma voa statu ar roue Gralon var varc'h, etre daou dour ilis S. Caourintin. Eno e vije canet var vuzic. Epad se eur serjant poliç a bigne var taillard ar marc'h, eur voutaill, eur veren hac eur zerviet en e zorn ; emân

a garge ar veren a win, e bresante d'ar roue, a dorche e vuzellon d'ar prinç, hac e stlape ar veren var ar blacen. Ar bobl en foul a zaille evit e drapout, hac an hini en rente, hep na vije faoutet na torret, en devije cant scoët evit e boan. Goude ze e vije laqet eur branq lore en dorn ar roue Gralon.

*G. Petra a leverot deus ar C'hiroasic?*

*R.* Ar grague hac ar merc'het yaouanq, gūisqet caer, hac ornet demeus a bep seurt fleurieu, a rede var eur garrec a voa var bord ar môr, hac eno, o daoulagad savet varzu an ên, hac o diyrac'h en êr, e canent, pa velent al lapousset-môr:

Lapous, lapous, lapous,

Digas din va fried, ha din va amoureux.

*G. Petra eo bividiguez ar Vretonet?*

*R.* Ar Vretonet a gar ar religion dreist pep tra, hac ar brassa attachamant o deus evit ar Franç; meurbet int hospitalierien. Mes rebech a rêr da galz da garout re o banne, ha da nonpas bea propr avoalc'h. Ar pez a eston calz a dud, è gūelet peguen dies e zoar azeet ouz taul, evel pa ve dies caout eur bang qempen evit bea en huledet hac en distanç convenapl, ar pez a bermetfe lezel ar scudel var an daul, e lec'h e delc'hel etre an daouarn. Ar routin a ra calz a c'haou, rac na c'hoantaer qet planta goe avalou, rac aon da vea laeret, hep sônjal penos, amezeg an hini a blantfe goe avalou, o velet en defe emâ calz a avantaj, a deufe ive d'e dro da blanta e-unan; hac an cil en ser eguile, o defe ar blijadur da gaout eur banne gist d'o repasiou, dreist oll da derri o zec'hed epad al labouriou rust eus an eost.

Ma sônjfet ervad er profit a denner eus ar gist, ispecial gant plant eon evel a zo bremâ, en em hasifet da blanta. Eun de da zont e vo gūelet hor brô, evel Goengamp, ar Faouet, Qemperle ha Moelan, eur vrô a gist mad, hep cessi da vea eur vrô vad a hed.

A tillach a dlefet ramplaci dre bleinch. Eur c'hustum lous ê ive c'hoeza ar fri gant ar biziet, hac eva varlerc'h den, hep rinça ar picher pe ar scudel. Ar respet a dleer da Zoue a dlefe miret da grancha en ilis. An habitud fall da lezel a bep seurt loustoni vardro an ty, zo penn-caus a galz a glénvejou, herves an oll vedecin. Neuze, e-lec'h guervel eur medecin, ne rêr peurvuia nemet remejou comerezet, ha ne glasqer ar medecin nemet re diveat alies. Tleout a rafet ober granjou evit dastum an hed, e câs a c'hlaou, qentoc'h eguet en lezel en dram. Nac a gollou a rêr, en defot ar brecotion-ze!

Ar pez a vanq var ar mêz, hac a dlefet caout en peb tieguez, eo diou blanqennic, an eil a uz d'eben, staguet er c'huz-tol, var bere e ve renqet Levriou eus a bere e caver al listen en eilvet pajen eus ar C'honfrançou-mâ.

An oll Levriou-ze a gaver e ty LÉDAN, Imprimer, e e traon ru ar Vur, e Montroulez.

Mar sônjfet en avantaj a dennêr o lenn levriou mad, ne vanqfet qet da gaout eun nebet e peb ty.

Pa antreo eun den henac desqet en eun ty, qerqent ha ma velo eun tam bibliotêq, e lavaro gant joa : Ah! amâ e zeus tud hac a c'hoanta en em instrui. Enor dêze!

Qement a meus lavaret na dle choqi den, rac ne zeus bet nep intantion d'en ober : control a ze ê.

Mes, poent ê achui hor C'honfrançou, rac aon, e lec'h amuzi, ec'h enoufent, ar pez na zeziràn qet. Va c'hoant ê laqat tremen eur momentic a blijadur en nosveziou hir eus ar gouân, o lenn al levric-mâ. Contant meurbet e vin, ma ell plijout d'am c'henvrois divar ar meaz.

A. LÉDAN.

FIN.

---

E Montroulez, e ty LÉDAN, Impr., e traon ru ar Vur.



*Propriété.*